



# CANTIC SPIRITUEL

## EUS AN ETERNITE.

Var un ton nevez.

**M**E vel an traou er bet-màn ne guint nemet  
mouguet,

An oll reusiou a dremen, negues tra assuret :

Adieu eta trompleres, adieu pep vanite,

Ar buhez-màn a dremen, arru an eternite,

Arru an eternite, laqua evez ma den,

Arru an eternite, ar joa pe an anquen.

C'hoant bras emeus evit mat da dilesel ar bet,  
Evit ma hillin heulia Jesus-Crucifiet ;

C'hoant bras emeus da gommanç da servich a Doue ;

Car, allas, hir eo sioas, his an eternite.

Allas ! Guerc'hes biniguët, ur fai bras emeus gret

Da veza dileset va Doue darbet e din bea collet,

Rac-se deoc'h emeus recours, mam eus a drugare,

Car, allas ! hir eo, guerches, hir an eternite.

Allas pel so aba edon e heul bombanç ar bet,

Ancouët emeus Doue, gret mil ha mil pechet,

Allas ! poent eo din commanç da ouëla nos ha de ;

Car allas ! hir eo siovas, hir an eternite.

Celaouet oll, tut monden, ho pompou nos ha de,  
 Grit reflexionou, ha ehagrin ho pezo goude,  
 Hac ous poaniou an ifern ho pet aoun rac Doue:  
 Car allas! hir eo, hir eo, hir an eternite.

Tut yaouanc, mar em credet, er bet na fiziet  
 quet,  
 Ho consort en afferiou a so breman collet,  
 Bezit furac'h evite, distroit oc'h Doue:  
 Car allas, hir eo, etc.

Na c'hortoet quet ar c'hozni da ober pinigen,  
 Chasseet ho yaouanc'tis hac ho quisiou monden,  
 Ho fallagriez cuzet horribl dirac Doue:  
 Car allas! hir eo, etc.

Ne zeut quet da lavaret gant ho presumption,  
 Doue so misericors, a rañ deomp pardon,  
 Cals evelse so tromplet, ha c'hui vezo ivez:  
 Car allas! hir eo, etc.

An Ælet er barados a so melconiet,  
 Oc'h o gulet o ruillal e bonbançou ar bet,  
 Lequet evez emint dy berric eo ar vuhe;  
 Ha siouas, hir eo, etc.

Ar sent o deus renoncet d'ho fligeadurezou,  
 Evit imita Jesus en e oll tourmanchou,  
 Gret o deveus pinigen, ha c'hui gret ive:  
 Car allas! hir eo, etc.

Ma ouffac'h sur, tut monden, petra eo Doue,  
 Ne garac'h james biquen choqui e vajeste.  
 Rac-se eta, tut ar bet deut da vouëla bemde;  
 Car allas! hir eo, etc.

Ma ouffac'h peguen horribl ez eo dirac e faç:

E coëffac'h e disesper eguis ma en deus Judas  
 Lequet eves, tut monden, eus a vengeance Doue,  
 Car allas ! hir eo, etc.

Brema pa oc'heus amser grit ur binigen vat,  
 Mar deü ar maro d'ho surpren, eviot divezat,  
 Hastet eta da vouga ar goler a Zoue,  
 Car allas ! hir eo, etc.

Ar bet-man so un desert da ober pinigen,  
 Na basseet oc'h amser e pligeaduresou væn ;  
 Car divesat vezo deoc'h distroï oc'h Doue :  
 Car arru eo, arru eo, arru an eternite.

Antreet en ho calon da ober oræson,  
 Ha songet en hor Salver, hac en e bassion,  
 Imitet e souffrançou epad oc'h oll buhe,  
 Car allas, hir eo, hir eo, hir an eternite.

Interroget en iffern an eneou daunet,  
 Petra so caos d'o malheur ha d'o foan diremet,  
 Hac e respontint : ar bet, ar vanite,  
 A so caos d'on tourmanchou het un eternite.

Goulennet c'hoas digante pegueit e pado  
 O tourmanchou quer gries, hac hi a finisso,  
 Allas, allas ! emin-di entre pado Doue,  
 E pado hon tourmanchou het un eternite.

Pa vo passeet cant mil bloas, ne raimp nemet  
 commanç,  
 Poaniou nevez, adarre, hep quet a esperanc,  
 Ruillal a raimp er flammou eus a goler Doue,  
 Allas ! sioas peguent hir eo an eternite !  
 Mallos d'on tad ha d'or mam, a so gueneomp  
 daounet,

Ha gant o goal exemplou , goal sel o deus guelet ,  
Emaomp oll en iffernou , tat , mam ha bugale ,  
Biquen ne velimp Doue het un eternite.

Milliguet omp gant Doue milliguet gant ar sânt  
An diaoulou milliguet so bet mam d'or c'herent ,  
Mallos Doue so voarnomp , malediction Doue ,  
Hor c'honduo da jamæs het un eternite.

Hor membrou , hon isili a so aman poaset ,  
Allas ! siouas , ar maro a dec'h ous or guelet ,  
Allas ! ne hallomp mervel , malediction Doue  
Hor c'honduo da jamæs het un eternite.

Ne falle quet deomp mervel er bet etre edomp  
Brema e caremp mervel , ha mervel ne hal-  
lomp ,

'Allas ! ni gare mervel , heus on deus rac Doue ,  
E vallos 'a goues voarnomp het un eternite.

Iudal a reomp en iffern gant an oll diaoulou ,  
Chadennet omp ganto ebars ar c'hoteriou ,  
Ne ouzomp pelec'h monet ar goler a Zoue ,  
A lanç foeltr voarnomp het un eternite.

Ma ve roet deomp ur momet da denna hon  
hanal ,

Martese on deveus couraig evit miac'h harpal ,  
Mæs allas ! pas un instant , ar visaig a Zoue ,  
Sur a luguerno voarnomp het un eternite.

O siouas pebes malheur ! o pebes disesper !  
Pebes gounnar arraget ? n'hon deus mui a  
amser

An termen eus hor poaniou eo coler Doue ,  
Hag a zisplego voarnomp het un eternite.

Diaoulou , drouc - sperejou , quement so en  
 iffern ,

Antreet en hor c'horfou , achuet d'hon dispen,  
 Mæs ar maro a dec'ho , hac an dorn a Zoue ,  
 Hon dalc'ho en tourmanchou het un eternite.

Ma Jesus petra gleon-me , bet on bet estlamet ,  
 O tont da clevet ar c'hlemou eus an eneou dau-  
 net ,

Heus emeus ous o c'hleout , crena a ran va Doue :  
 Car allas ! hir eo , hir eo , hir an eternite.

Pedet evidoun , guerc'hes , evit na vin collet  
 Pellait ar malheuriou a so e heul ar bet ,  
 Pedet evidoun , guerc'hes , pedet mam a druez  
 Car allas ! hir eo , hir eo , hir an eternite.

Distroit nep a garo , pe na distroit quet ,  
 Ret eo beza buquen salvet , pe ur jamæs collet ,  
 Fallaat a ra va c'halon , pa o quelan , va Doue ,  
 Ha pa songean peguen hir eo an eternite.

Pa gontemplan va Salver e lamgroas astennet  
 Evit an oll pec'hedou so guennenn commettet ,  
 Fallaat a ra va c'halon , pa ho quelan va  
 Doue ,

Ha pa songean peguen hir eo an eternite.

Bete brema nemeus quet songet en ho poan-  
 niou

Mæs pellac'h bet'er maro me a scuillo daëlou  
 Evit guelc'hi va ene , ma pligeo gant Doue  
 Car allas ! hir eo , hir eo , hir an eternite.

Gant Jesus me chommo em c'halon en  
 secret ,

Ho eno me a vouëlo deis ha nos d'am pec'hret,  
 E a vouëlo gant Madelen e quichen ma Doue,  
 Car allas ! hir eo , hir eo , hir an eternite.

E goulou sacr ma Jesus , e vo ma demeure  
 ranç ,

Eno e vo ma studi , eno ma oll fizianç ,  
 Ar bet so tromplerez , hac a so ur passe ,  
 Adieu a lavaran dezan het un eternite.



## CANTIC SPIRITUEL,

*Hac un Exempl abalamour da ur Femellen yaouanc  
 Danseres a voe daonet en deffot beza sentet eus  
 e Dat hac e Vam.*

**G**Levit bras ha bihan quement den so ganet  
 Exempl digant ur plac'h yaouanc punisset,  
 En deffot da senti ous e dat hac e vam,  
 Lonquet gant an iffenn a daonet en tan flam.

Me a so merc'h da un taverner pinvidic ,  
 Am magas re friant a pa voan yaouanque ,  
 Ha pegument bennac sur ma zat ha ma mam ,  
 Evient tut honest , me a so bet infam.

Ne pedan quet malheur , na da vam na da zat  
 Rac me a voa gante bepret queleynet mat ,  
 Ma mallos a pedan d'am desobeissanç  
 Rac memeus re caret bet , ar bal hac an dang  
 Rac er commançamant eus ma yaouanetis

Da bep seurt liberte ha pep seurt friantis ,  
 Ma gloar , ma oll pompat voa beza enoret ,  
 Ar vraovan femellen a guement a gafset.

Quement a ren siouas ous en em diguisa ,  
 Hac ous en em pinta , dansal ha priata ,  
 A ur gueric e Sedan pelec'h voan guinidic  
 N'em espernent nicun na nobl na pinvidic.

Un nosves dreist an oll pa voan o vont dar bal  
 En compagnunez vrao evel ma gloar ,  
 Hep beza goulennet conge na mam na tat ,  
 E quivis ma malheur e creis ma oll ebat.

Pa voan o partia desort occasion ,  
 Ma mam a lavaras gant ur guir ha rason ,  
 Ma merc'h pelc'h e zeet retournet voar ho quis  
 Pe certen ho pezo ur c'halonat exquis.

Ne ris semblant er bet eus a gomsou ma-mam ,  
 Quen nebeut rac ma zat dougeañç me n'em boe  
 tam ,

E rancontri a ris hac eus lavaret din  
 Ma chetu canfardes deut guene prest d'an ty.

Dleet eo er guis-se da ur verc'h disquet mat ,  
 Mont da redec en nos hep conge mam na tat ,  
 Me lavar buhan dre coler hep dougeañç ,  
 En despit deoc'h ma zat me yalo sur d'an danç.

Quer quentic hac ar goms me a guitas ma zat ,  
 Hac en em transportis el lec'h ma voa'n'ebate ,  
 Gant aoun n'em attrapse e sertis prest an or ,  
 Siouas gant ma c'halon me cavas franc digor.

Rac-se voan recevet gant nombr a dut galant ,  
 Haleguenta gate dre ma voan ur plac'h coant ,

Mes noas var ma reus pa ne caren senti ;  
 Muy a se a so bet testou voar ma drouc fin.

D'am c'henta tro en danç , an douar digoret ,  
 Nao serpent estonus a so bet sortiet ,  
 O deus ma transportet demes a creis an danç  
 N'em difenne nep den courtesan na noblanç.

Pa velsont ar malheur pep unan a crene ,  
 Gant aoun , tribuil ha spont rac jugeamant Doue.  
 Et voa gant an diaoul ves o presanç ar plac'h ,  
 Ha taolet en ifern ne ouysent quet e nac'h.

Doue d'ar bugale en deveus commandet  
 Senti ous tat ha mam gant enor ha respet ,  
 Allas ! me n'emeus quet hac evelse Doue  
 En deus gret a c'hanon exempl d'ar vugale.

Ha c'hui oll tut yaouanc ar viriones credet ,  
 Ous ho tat hac ho mam en ho profit sentet ,  
 Hac ous nep a lavaro deoc'h ho silvidigues ,  
 Sentit pa ves Doue a comse ouzoc'h ives.

Na laquet quet ho c'hoant en bragueriesou  
 Da riblan ha da dansal evit nep amourou ,  
 Arre se so hinchou ar serpent infernal ,  
 Deoc'h sur couls ha dime ma na guerret dioual.

*F I N.*